



REGIMENT Ar Merc'het Yaouank

VAR EUN TON GALLEC

1^o Couplet

Breman me meus clevet
Vo gret eur regiment
En lini vo c'lasset
An oll merc'het vaillant
Da vont ober brezel
Var an ennemiet,
Betek vo red mervel,
Velfont fidel bepred.

Diskan.

Paset merc'het vaillant
Breman er bragou rus
Da vont d'ar regiment,
Vefel galvet dustu.

2^o Couplet

En plas ho robannou
Danves deus ar c'haera
C'hui a po eur bragou
Deus mezer sa grossa
Hag en dre ho corfou
C'hui po eur centurenou
He taoulagat lirin
Oute neuze vrillo.

3^o Couplet

Ho bleo hir a bentei
En demesellet coant
Breman a vo troc'het
Vel guir soudard vaillant
Ag en lech ho coeffou
C'hui po casquetennou.

O deo, cocardennou
A give eur poupon.

4^o Couplet

En plac ho potinou
C'hui boutou gros.
Vit heuil an armeou,
Couls en devel en nos,
Evit en em c'holo
A po eur cadoten,
Omne vap d'ech rayo
Pa vo en amzer ven.

5^o Couplet

D'eus ar merc'het coanta
Certen e voa choaset
Er c'hargou huella
A da capitennel,
Ar re quisket mad
A vo er burayou
E o vec fond ervad
O c'hueil an' armeou.

6^o Couplet

Ar merc'het teo a lard
Vo er gavaljerri
Ac en oll verc'het stad
Vo en eur artillirie
Vit gallou remui
Ar beuyion caloniou
D'oper d'an eunemi
Cals ten ho bollijou.

7^e Couplet

Ag ar broderezet,
 Vo ea voltigerien,
 Ar guemenerezet
 A vo bars e linen,
 E chasourien var droad,
 Vo ar merc'het a gamp,
 Blamour in fellcat
 Ag eur vœs elokant.

8^e Couplet

Da vont en hussardel
 Ar gueguinerezet,
 Ebars an dragonnet,
 Vra gueguinerezet
 Merc'het ar pinsonuiou
 E vo er zoafel ;
 A dustum so kelon
 Vont infirmiet.

9^e Couplet

En infantiri marin,
 Ar baperezet
 Er c'honseil disciplin
 A ro deo meritel,
 Da vont er saberien
 Ar merc'het terrupla.
 Evel ceus archerien
 A vo pen kenta.

10^e Couplet

Penn a regimenchou
 Breman e vo laqet
 Gant an tamboulinou,
 Ar guir everezet
 Ag ar stamerezet,
 A zo er c'hlaironniou
 Dre m'in corfou ezet
 En pen deus an trou pou.

11^e Couplet

Vit son ar musikou
 Ar goampoerezet
 En heuil an armeou
 A vo pro da welet
 Ag en ostizezet
 Cant ho ardou malin,
 A vo cantinierezet,
 A werzo vit gwin.

12^e Couplet

Ceta aze merc'het,
 Evidoc'h eur c'helou
 Cals ac hanoch me gred
 A vo trist ho guinou
 Pa ve ret dec'h mouet
 Da heuil ho bataillon
 Bezit fidel bepred
 Evit an nation.



CHANSON NEVEZ

DAOU DEN YAOUANK DEUS A GEAR MONTROULEZ

VAR EUN TON GALLEC

Ar goas

Bonjour va douz va c'harentez
 Deut hon gant gwir humilite (bis)
 Da lavaret dit kenavo
 Hon deut amau (bis)
 Ma servicha an drapo,
 Daout ranhan breman..

Ar plac'h

Oh ! Louis va maüs karet,
 Mervel a rin gant boan speret
 Assembles ganit breman,
 Me a lelo (bis)
 Birviken did ne venkan
 Beteg eur ar maro.

Ar goas

O ! Marivon va dousik coant
Te ne deui ket d'ar regiment
Cals a dourmanchou
Zo er brezel, (bis)
Bars en tonez ar soufranzou
E leufes da vervel

Ar plac'h

Ma vefe red din brezeli
Me rofe plom d'an ennemi,
Me ziscete va c'hanouillou
E crets an tan (bis)
Vin ket plac'h treitour na lach
Da dennar Prussian.

Ar goas

Va mestres ker e kreis an tan
Evid eur plac'h so re à boan
A gant trons ar c'hanouillou
Teufes bouzar
A gant ners ar mitrailou
E couefes d'an donar.

Ar plac'h

Ma ne c'han da vrezelli.
Da ronta fas d'an ennemi,
Me a ve cantinière.

Er regiment (bis)
Me ratko mont ganez
Evel gwir plac'h vaillant

Ar goas

Neuze ta va douc Marivon
Qui efomp ou daou o c'halon
Ben e nebeudic amzer
Gant gras Doue (bis)
Nin a retourne d'ar gear
D'ar dro ha pep contre.

Partiet in d'ar regiment
O daou gant eur c'halon content
Da servicha ar drapo
In partiet, in partiet
A beteg eur ar mario
Velfond fidel bepred.

Cetu aze va mignonet
Daou den en em garie parfet
O ia bars an honestis
A barfadet, a barfedet
Gret evel a yaouankis
Bezit fidel bepred.

EUN DIMEZI GRET GANT AR VAM

VAR TON : ROSET

Ar vam

Eruo eo ar moment
Va merc'h ret eo dimezi
A da sonjal breman
Petra peus d'a ober
Dadimezi breman
D'an amzer prezant.

Ar Verc'h

Va mam ne gomzit
Din c'hoas deus a zimezi bis
Re yaouanck ho c'hoas
Da von da ren ar peq
Ne meus n'emet c'houzec vloas
Dimezi ne rin ket.

Ar Vam

Va merc'h sent diouzin
 Rag ma quittain ar bed (bis)
 Gant aon em goudet
 E neur gafes tromble
 Ar ar rest ar vue
 Malherus var ar bed.

Ar perc'h

C'hui ne noc'h duet prest c'hoas
 Da mam da zont dan c'huitat
 Ben nebeut blaveziou (bis)
 Vin muioc'h avancet
 A ben fin ho tefo,
 Me amo va choas gret.

Ar vam

Va merc'h eun den yaoank
 A so demeus da choulen
 A so den a zoaré, (bis)
 Hervez ma seblant din,
 A deu a qualite.
 Kemer n'hean hardis.

Ar perc'h

Va mam en ho cosni
 Ne gleam ket ho refus,
 Ma ran eur barti fall, (bis)
 Neur glem na rin biken ;
 Mez c'hui deut da zioual,
 Ne be goude anken.

Ar vam

Va merc'h me en assur
 Deus ar bez a meus laret
 Gant heues vi contant (bis)
 Te ma vi var ar bed ;
 Dimez hep nec'hamant,
 Bara did vako ket

An dimezi

Cetu ta dimezet
 Ar plac'hic gant he mam
 D'an oad a c'hezec vloas (bis)
 Da vont da roul ar bed
 A goud petra re c'hoas
 Allas ! ne ouie ket.

Ar plijadur

Eur pennad e zin bet
 O veva gant plijadur (bis)
 Siouas an erusted
 E ped neo ket padus
 Rag eman e deus bed
 En ben gwel dangerus.

Ar disesper

Ousquen meo, bidalve
 Eo sur ive bambocher (bis)
 An arc'hant a gonno
 An dro par an zizun
 Var eur en loneet en e de.

Ar guel Vue

Pa neur gav c'hoas er ger
 E commans d'ober huc
 Tollet a distollet (bis)
 Alies pazardet
 Cetu aze ar vue
 Zo entre daon brie.

Ar vam desolet

He mam pe deus gwelet
 Ar vue voa entreze
 A zo pet dezolet
 O velet de gred
 Malheur-er merch caret
 Tre vije var ar bed

Ar vis

C'houi tadou a mamou
 Ne re ket evel homan
 Ne deuket da bressi (bis)
 Dimez ho bugale
 Gant aonp evelti
 O pefe keus goude.

Lesit ho pugale
 Ho eun d'ober ho choas
 Pa eo int rank usa (bis)
 Eo just d'he c'hoas ive
 Ma ne larit netra
 Velfe divlam goude.